

Chanson Baccus

(Modernnaet eo bet an doare-skriva).

Euz a-zouez ar Baryaned,
Baccus a zo en idol.

E ano 'zo Yann Vourdel,
C'hoaz en-deus mil ano drol.

Antreom en ostaliri,
Harsa eta, kamarad.

Tostait amañ, va mignon,
Ma mom beb a chopinad.

An Tad Santel en e Balez,
Gand e oll Gardinaled,

A ev gwin a-chopinadou,
Hep soñjal en droug ebed.

Ar Veneh en o houentchou,
Ar veleien reglet mad.

N'o-deus evid o forsion,
Nemed beb a chopinad.

Ni etrezom, kamaraded,
A Zant Paol, a Zant Anton.

Pa deu eur mignon d'or gweled,
E redoubl din eur chopinad.

Ha me ne vin ket skrupuluz
En-kichenn eur voutaillad.

Pa ven em oll gontantamant
Hag em oll blijadurez

Eur mignon ganen asamblez
Peotramant eur vignonez,

A zo gwelloc'h eun treitour,
A-zirazoh ho meulo.

Hag a raio goap ahanoh.
Goude-ze ho tikrio.

Gweleh ar fason 'ta, keginer,
Kerz beteg ar varrikenn

Ha ma vank dezi heh alan,
Laka sao dindan he fenn.

Toud e ranko beza evet,
Hab na chomo eur berad

Ken ma yelom euz an ti-mañ,
E vo lipet an tufad.

Manket eo heh alan dezi,
Ne deu mui nemed al li¹.

Harsa eta, kamaraded
Dem-ni pep hini d'e di.

An ostiz hag an ostizez,
O-deus servijet mad,

O-deus roet dem sklêrijenn,
'Hed an deiz da labourad.

Lipet ez eus toud ar gwin koz,
Al liker, am lodivi.

Ha soñjom moned da eva,
Ne ziverez banne mui.

Harsa eta kamaraded,
Poent e' dem en em guitaad.

Pa vo deut hini neve',
Ni 'm-bo peb a chopinad.

En ano Doue, pa vin maro,
Ne zoni ket ar glazou din.

Ar piton² hag ar gwerennou,
Ar re-ze a zono din.

E skol Baccus ma 'beus desket,
Goro piz ar varrikenn.

Eñ a zo eun den a spered,
Bez e teuze kalz a skiant.

En an' Doue, pa vin maro
Hag interet e kav ar gwin,

¹ li : galleg : al lehidenn.

² piton : ?

Va zreid dindan ar varrikenn,
An dueleñn euz va min.

Ar beradou a zivero,
A gouezo e-barz ma genou.

Ha mar deu dezi didala,
Gwalhe va halonenn bezo.

Harsa eta, kompagnunez,
Brema~~'fello deoh kleved.

Piou en-deus war sujed Baccus,
Ar zon nevez kompozet.

An hini 'n-eus he hompozet,
A zo eur baleer bro.

En eur eva chopinadou,
Divinit piou e ano.